

SON AR GARANTE BARFET.

Var ton : *Malgré toute la tendresse.*

1046 A 1/

Laqet eo en hor c'halonou
An desir d'en em garet,
Unan demeus hon ezomou
Eo a garante barfet ;
Destinet eo da beb unan,
Gant eun urz leun a furnez,
E stad hac e chang er bed-man,
Darn so contant, darn diez.

O compren gant attantion,
Quement-se, hac o selaou
An ecot demeus ar c'hanton,
A respont ouz ar moeziou,
Me m'eus remerqet o tremen,
Gant eun ér gyé ha contant.
Dre va c'hichen, eur feumelen,
Pini a ra va zourmant.

Pa meus-hi guelet o tostat,
Oun comancet da grenn,
Bervi a ré ennon va goat,
Gant an aoun hac ar joa ;
Qer troublet e oa va speret,
Qen em boa poan o parlant ;
Couscoude e meus discleriet
Evelen va zantimant.

Bonjour dec'h, feumelen charmant,
Ha dign da veza caret !
Ma ouffec'h o pe santimant
Emoun-me en oc'h andret,
Ma c'halfec'h guelet an tourmant
Ho peus laqet em speret,
E teufec'h gant impressant
Da soulaji va c'hlenvet.

Aboé ma meus hoc'h anaveet
E concevis evidoc'h
Eun amitié hac eur respet
N'oufe qet beza brassoc'h,
Ret e ve deoc'h beza ingrat,
Ma na zeud eus ho costez
Da gavout anoudeguez vat
A gement a garantez.

Ar Plac'h.

Tavit gant ho complimanchou
Hac o fidelite vras,
C'houi a suppos santimanchou
Na n'hoc'heus santet biscoas ;
Rac m'ho pijs, a geid amzer
Evidoun-me concevet
Eun inclination sincer,
C'houi ho pijs din merqet.

An Den Yaouanq.

Merqet emeus dec'h ho caren
Dre va féçon da ober ;
Hannes eo a guella moyen
Da dremen evit sincer :
Mes cresqi a rit va zourmant,
Dre eun discour qer cruel ;
Elec'h rei din soulajamant,
E teuit d'ober din mervel.

Ar Plac'h.

Den yaouanq, c'houi peus preparet
Evel ma fot ho quentel ;

Mes n'en doc'h qet qen resoltet
D'en em lezel da vervel,
C'houi a fot dec'h va abusi
Dre ho comzou studiet ;
Ma vent sot aoualc'h d'ho credi,
C'houi c'hoarsfe var va sujet.

An Den Yaouanq.

Plac'h yaouanq, mar qarit sonjal
E meur boent eus va bue,
E velfec'h, elec'h godissal,
E laran ar virione,
Rac er bep seurt occasion
E meus roet dec'h da gompren,
Dre an hirvoud eus va c'halon,
Pegement en ho carien.

Ar Plac'h.

N'emeus ho quelet oc'h c'hober
Nemet evel meur a hini ;
Dibot eo ar voaset sincer
A eller da rancontri :
Cessit ta d'am importuni,
Tavit gant hoc'h amitié,
Ha ne zeut mui d'en em vant
Gant ho fos fidelite.

An Den Yaouanq.

O pebez eun dristid'geez !
O glac'har cri ha c'hoëro !
N'oun qet caret gant ma mestres ;
Guel e din beza maro,
An eol, dirac va daoulagad,
Ne ro mui a sclerijen,
Ha nemet em bez né vent mat
En creis an devalijen !

Ar Plac'h.

Truez emeus ous ho quelet
En eur glac'har qer grevus ;
Ho calon a zo contristet,
Pe ez oc'h eun den tromplus :
Mes ma ouïen e veoc'h sincer,
Den yaouanq m'ho quemerfe
Eus a vremen da servicher ;
Marteze me ho carfe.

An Den Yaouanq.

C'hui, va mestrez, c'hui a blij din
Dreist qement zo er bed-man.
Na bigen nicun na garin
Neme doc'h-hu hoc'h unan :
Quittet, quittet an douetanç
Ho c'heus var va c'harante :
Me en tou dec'h en assuranc
Bigen nemedoc'h n'am be.

Ar Plac'h.

Sant Pêr en doa d'e Vestr tout
Enep e adversourien,
Penos ne vije qet manqet
D'he sicour ha d'en difen,
Allas ! ancouat raz e le
Qent m'en doa ar c'hoc canet ;
Ar Sant en devoa gouscoude
Teir guech e zianzavet.

An Den Yaouanq.

Sant Pêr en doa dianzavet
E Vestr mat dirac an oll ;
C'houi ganen a zo qen c'zret,
Qen a rafen ar c'hontrol.
Dirac an oll du assembles,
Me so prest da siscleria
Penos e c'houi sur va mestres,
Va flijadur ha va joa.

Ar Plac'h.

Diganec'h ne c'houlennan qet
E teufec'h da bublia
Ar pezh biscoas n'ho c'heus sonjet
Marteze bete vrema.
Guel e ve ganen e teufec'h
Dre eur sacrific benac
Ha brouvi din scler em c'harfec'h
Gant eun intacion vad.

An Den Yaouanq.

Goulen diganen, va mestres,
Ar sacrific a g' ret ;
Goulet mar qeri va buez,
Ne viot qit refuset :
Nemet ma ellin, qent mervel,
Obten. e creis va sourmant,
Eus ho compassion eur zell,
Ractal e varvin contant.

Ar Plac'h.

Den yaouanq, me a meus clevet
E voac'h eun den variant,
O c'heus, gaude bean comancet,
Torret meur angajamant ;
Birviquez, hac en lavaran,
Ne recevin eur galon
Et obteni ma ne allan
Dre ar guenta donezon.

An Den Yaouanq.

Pa form Doue eur feumelen,
E crou prest eur par dezi ;
Mes peil e vent, mar en ordren ;
O daou en em rancontri,
Rac-se eta, angajamant,
Promessa hac amitie,
Grêt ouz re âli, a so neant
D'an eil evel d'eguile.

Ar Plac'h.

Brema me vel patant ha scler
N'ho c'heus qen intacion
Nemet da dremen hoc'h amzer,
Ouz va c'henti, va mignon,
Abret eta va dilezet,
Ha retornit adare
D'an hini ho peus prometet
Da guenta ho carante.

An Den Yaouanq.

Va mestres, credit a allet,
Ouz hoc'h c'hanavout quentoc'h,
Va speret na bermetje qet
Carout nicun nemedoc'h :
H mar be ret d'in separi
Diouzoc'h, va c'harante,
Ampoezonet gant an annui,
Ne vo qet hir va bue.

Ar Plac'h.

Avoalc'h, avoalc'h, zervicher,
Re e meus ho tourmantet,

Rac brema me anave scler
Peguement em cherisset.
Mar meus gret dec'h anduri
Eun tretamant qer cruel,
E voa eyit oc'h aprouvi
Ha gout ha c'houi voa fidel.

An Den Yaouanq.

O distro leun a garantez
Hac a vir gompasion,
Ha possubl e ve, va mestrez,
E ve touchet ho calon !
Beza meus-me an esperanc
Da velet fin d'am poaniou,
Ha da receo ar recompang
Demeus va ol' hirvoudou ?

Ar Plac'h.

Va mignon sec'hit ho taélou,
Va zervicher, me ho ped,
Hac en em cherissomp hon daou
Gant eur garante barfet.
Eus va feurz ho c'heus anduret
An diveza affliction,
Eesperout a ran e teufet
Da accordi din pardon.

An Den Yaouanq.

Evel ma ro ar glis neve
Ar vue d'ar yeot sec'het,
Ho comzou a zeu evelse
Da zoulaji va speret ;
Dre eun avis qer gracios,
Me meus esper da veva,
Noapas hep qen eun den eürus,
Mes eun den an eürussa.

Ho torn em hini, va mestrez,
Ha touomp dirac an Ee,
Penos e vimp, hed hor buez,
Fidel an eil d'eguile.
Ne zonzomp mui en hor glac'har,
N'em garomp ha ni gavo
Eur barados var an douar,
Dre hor plijadurezo.

Var an douar ne n'eus netra
Qen douc hac an esperanc ;
Alies e ra mui a joa
Eget ar guir jouissanc ;
Eur present eo digant Doue
Da zoulaji an natur ;
Hac e ve hon tromp a rafe
C'hoas e ra deomp plijadur.

Roue an Ee hac an douar,
Me anvez ho madelez,
Hac a rent dec'h enor ha gloar,
Ha graçou a drugarez :
Dec'hu ho c'hunan eo dleet
Da genta va c'harantez ;
Goude ze, mar er permetet,
He c'honservin d'am mestrez.

C'hui, va Doue, ho c'heus formet,
Dre eun urz leun a furnez,
Eva da Adam da bried,
Hac o laqet assembles ;
Plijet ganeoc'h, Oll-Puissant,
E ve din me destinat
Ar feumelen-man qer charmant,
Ho peuz gret din da garet!

Moulet gant intañvez Ar Gollie, e Lauhuon.